

Chanson.

(433, suite)

Var ton :

Me meus choaset eur plac'h d'am gout,
 Ma vijen evit he meritout ;
 Mes euy drue vras e he c'hol ganen :
 Carget e a humilitée .

Ma ya bemnos, pa ve debret va c'hoan,
 Da velet va mestrez va-unan,
 Da gonta d'ey va zantimant ;
 Cl'evet e hini ameus c'hoant .

Pam boa-me contet d'ey dija
 Va zantimant, ep nac'h netra,
 He deveus dinme respontet,
 E carien re ar quin cl'evet .
 Ar quin cl'evet a voa d'am gout,
 Implija va maou a reñ tout .

(434)

Ma yan-me d'ar c'havarn da evan,
 Mar gevàn boutaillad, hac er gran,
 Biscoas nameus ho coulennet
 Da bea ar quin ameus evet .

Va Mestrez, genta m'o quelis .
 Me o gernerje eñ hoc'h iris ;
 Breman me n'o gernerfeñ get,
 Hac e vec'h perc'hen da bemp cant scoet .

Ma vijen perc'hen da bemp cant scoet,
 Me rangje caout euy den talvoudec ;
 Me rangje caout mab euy ozac'h mad,
 Nonpas euy ever boutaillad .

(435)

Mar d'an-me d'an davarn da evañ,
 Mar gervañ boutailhad, hac er grân,
 Biscoas netra na meus laeret
 Da beñ ar quin ameus evet.
 C'houi o poa laeret an alc'hoerjou,
 Pa voac'h mateg bars er Porjou.

Va Mestrez, din-me leveret,
 Ha qu'è ar peñ ameus clêvet?
 Me ameus clêvet lavaret
 E voac'h-u greg da eur bêleg.

Hac e ven-me greg da eur bêleg,
 Evel d'ar c'hraç Doue n'en don get,
 E tal get va roujou er fanç,
 Hac a dal ho moyen, den yaouanç.

Va Mestrez, ma vijec'h qercouls-se,
 C'houi vije charmant en ho contre;
 N'estiman get eur femelen,
 Ha na dal ar boan da vont d'e goulen.

(436)

Me a zo servicheres eun Otrou,
 Hac an bo cant scoet eus e vadou,
 Hac o laçai da drafiqi;
 Va douç, m'o crafte dizourci.

Va Mestrez, trugarecait oc'h otrou,
 Ha lest-u gantan e vadou;
 N'estiman get arc'hant prestat da zemerzi,
 Pa rençer e restitui.

Va douç, lèzomp an traou-ze creñ,
 Consideromp eur venanen,
 E deus eun ti gollo da gomant proaniñ,
 Hac e gra leun a beñ ar goañ.

(Vol. II, p. 435-436.)
 13 strophes numérotées.